

1

0117

Glac'har ar vamm.

Em c'hrouadur me'm oa fizians,
 faziet eo va esperans.

an esperans am va timat,
 e serje d'in vas daoulagad.

he daoulagad he deus serret
 e-hars va gwele astennet.

astennet eno, melen koar,
 o c'hortoz he flas en douar.

Douar benniget ar vered.

Em raok me va merch ho peus bet.

va merch ho peus bet k'er yaouank,
 Ho pouez a groazion a gouez stank.
 [Doue ho krouz] ^{ho krouz}

stank ha pounner 'vit va dioushoaz
 a bleg buan dindan ar groaz.

ar groaz da genta peus douget,
 Jezuz, va Zalver benniget.

Benniget ra vo hoc'h hano,
 Kouls er vuhez hag er maro.

ar maro n'eo metra d'in-me,
 Deut, pa gerfot, o va Doue.

O'va Doue deut d'am c'herchet
 A-raok ho tourm ne grenan ket

ne grenan ket ha koulskoude,
 Ma ve'r purgator he ene

2

He ene paou ma rank paea,
 Betek an diner diweza.

An diner - se' vezo paeet,
 Ganen, va doue, mar ^{d'eo} ~~bez~~ ret.

Mar d'eo ret, krestit c'hoaz va foan,
 Ma vezimp hon diou a-unan.

A-unan oc'h en em c'hortoz
 Pa zigoro ar baradoz.

